

KIS-597 – Un arver ideologek eus Gl. **représenter**

(GE – 23 09 98)

Bewech ma kejer gant Gl. *représenter* e ranker dezrannañ pizh ar c'healioù dec'heriet, rak an termen en deus un dousenn vat a generadurioù a c'haller berr ha berr ezrevellañ evel henn :

- a) Ober ar skeudenn eus udb., Br. *skeudenniñ* (arver lennegel ledan).
- b) Kaout udb. erouez d'ar spered (Al. *vorstellen*), Br. *derc'hañ* (sl. La-04, KIS-069, pp. 55-56).
- c) Aozañ un oberenn arz diwar-bouez lunioù tennet eus ar werc'helezh, Br. *diarluniañ* (sl. La-12, KIS-592, p. 208).
- d) Ambredañ ur werc'henn diwar-bouez un derc'henn, Br. *derc'hennañ* (sl. La-04, KIS-069, pp. 54-56 ; La-08, KIS-324, p. 278 & KIS-345, p. 334 ; La-09, KIS-405, p. 415 ; GSTL. ¶ 3637 □ ; La-10, KIS-446, p. 168).
- e) Ambredañ un derc'henn diwar-bouez un derc'henn gevatal, *rezhiennañ* (sl. GSTL. ¶ 3637 □ ; La-10, KIS-446, pp. 168 hh.)
- f) Ambredañ un derc'henn diwar-bouez ar werc'henn derc'hennet ganti, Br. *gwerc'hennañ* (sl. GSTL. ¶ 3637 □).
- g) A-berzh un dremmour, c'hoari ur pezh, enkreudañ un dudenn, Br. *dezerc'hañ* (sl. La-09, KIS-405, p. 415 ; La-10, KIS-446, p. 168).
- h) Derc'hel lec'h ub., ober en anv ub. dre berzh leuriadekaat (Al. *vertreten*), Br. *derc'houezañ* (sl. *Emsav* 29, p. 143 ; KIS-069, La-04, pp. 53-54 ; La-10, KIS-446, p. 168). Kaout galloud en anv ub., *derc'hallañ*, *bezañ derc'haller*.
- i) Er Jedoniezh, a-berzh un elfenn, derc'hel lec'h un ergorenn liesek, Br. *derc'hallañ* (La-10, KIS-446, pp. 170 hh. ; JEDO.I. *passim*).
- j) Er Stlenneg, diskouez ur stlennad war ar skramm, Br. *erouezañ* (sl. GSTL. ¶ 3637 □).
- k) Kemeradurioù laosk pe arbennik, Br. *lakaat war wel*, *amparañ*, *aroueziñ*, *deluniañ*, *kevregañ*, *dierviñ*, *dewerzhañ*, h.a. (sl. GSTL. ¶ 3637 □).

Kaout a rae din e oa klok an trosell a raen war steriegezh paoterek an termen, pa'm eus bet d'ober ouzh ur c'hemeradur n'hor boa ket bet tro da studiañ c'hoazh. Ha moarvat n'hor boa ket e studiet dre m'en kaver e-barzh troiennoù idiomatek ma'z a hogos pep ster diwar ar verb *représenter* — betek an deizioù-mañ ma c'houlennas RAH va ali evit treiñ ur frazenn a gave en ur gentel war istor an arz en 20^t kantved. Setu hi :

“**ABSTRACTION LYRIQUE : mouvement pictural (1940-1960) représenté aux États-Unis par Jackson Pollock et en France par Georges Mathieu.**”

D'ar sell kentañ eo rez d'ar meiz ar frazenn ha boutin enni arver ar ger *représenté*. Kregiñ a reas va souezh avat pa glaskis treiñ. Goude tastornat evel un alc'houezer e droñsad en e zorn e rankis anzav ne adkaven en arver-mañ eus *représenter* hini eus ar c'hemeradurioù hor boa renablet. An nesañ oa an hini renket a-zioc'h e h), eleze ar ster politikel pe genwerzhel, gant ur forc'had bras evelkent pa empleg *derc'houezañ* e revez endeo ar pezh a zo *derc'houezet*. Gant gerioù all, e komzer eus al luskad arzel evel pa vije ur voudelezh rakvezant na ve an arzourion nemet he *derc'houezourion* evel ma vez ar c'hannadour *derc'houezour* ar riez — pe ar beajour kenwerzh *derc'houezour* e stal.

Doe ra viro al lenner a ober ac'hanon un hemolc'her sorserezed pa ziskouezan un droienn aet idiomatek, neptuet enni ster kentañ ar gerioù, dizañjer erfin, evel azon ur pleg troziat eus ar speredegezh voutin ! Ur pleg a orin platonek anat : da bep tra e ve un *Derc'h*, un *ΔIdeva*, ur patrom peurbadel, a ve an arzour ivez o neuziañ diwarnañ e oberenn. Netra gwall noazus c'hoazh, emezevo : unan etre ar re all eo doazhadur PLATON, hep azlamm bras war gerzhed ar bed... Amañ avat e paouezan a sevel a-du gant tezenn an dizañjer. Rak an hevelep meizadur platonek eo a gaver atoret gant ar galloudoù politikel pa lakaont ar riez d'un *Derc'h* peurbadel (“*La France vient du fond des âges...*”, a lavare de gaulle, ar Frañsizion o vezañ d'ar muiañ an *derc'houezourion* anezhi). E seurt troiennoù pompus ha dinoaz emañ koachet pistri an ideologiezh. Trec'h houmañ eo bezañ emsilet en holl zomanoù al lavar, en arz pergen. Koun 'm eus a vezañ breutaet gant ur mignon gwiniour (ha dilenned sokialour) eus Saint-Émilion a-zivout Pierre Bonnard ; evitañ e oa al livour un *derc'houezour* “*du génie de la France*”... (ken, direizhet gant ar vrouez, e ris van da zismegañ Bonnard daoust m'en prizian kalz — nemet n'en prizian evel *derc'houezour* a dra ebet, evel *gwerc'houezour*¹

¹ Sl. La-10, KIS-457, p. 207. Dec'heriet eo keal ar *gwerc'houez* gant HUSSERL evel “*der leibhaftige Selbstgegenwart eines individuellen Objektes*” (*Ideen zu einer reinen Phänomenologie I* § 39, p. 70 [p. 81 er *Gesammelte Schriften* 5, Felix Meiner Verlag, 1992]) ;

ne lavar an ket !). Rak an arzour ne zerc'houez netra, ne zerc'houez ket ul luskad (seul gent a se ur vroad), al luskad eo a ziwan goude taol diwar e genderc'hadoù : al livour ne oar ket a-raok taol da belec'h ez a. Etre ar c'henderc'hadoù kent hag e genderc'hañ digent emañ lamm ar c'hrouiñ, an oberenn oc'h eskoriñ drezañ ; dre flipadenn e lavarer ne “zerc'houez” an oberenn nemeti he unan ; kantratoc'h eo, pa biauomp ar verb kevazas, lavarout ne c'hell an oberenn nemet *gwerc'houezañ* ; evel just, a eil lank, ur wech ma'z eo aet gougevan ouzh ar gedvuhez, e teu an istorourion d'he sellout evel o terc'houezañ ul luskad, ur remziad, ur vroad pe un oadvezh, met ur gwered meleour n'eus ken eno.

E se, diwar vont, emañ ar rebech pennañ d'ober d'al luskadoù breizhek ha da *Diwan* peurgetket : plakañ, hep an disterañ dezrann kealiadurel, o lavar hag o speredegzh diwar an ideologiezh o ren, houmañ gwriennet ken don ma'z eo garanet diheverzh (an dro eo da arverañ ar ger

!

1) er yezhoù hag er yezh a gelenont ; outo e c'hallfed goulenn ivez : da betra ar brezhoneg ?

Evit distreiñ da Gl. *représenté* e frazenn ar gentel, e kav din e ve kouezhañ en trap ideolegek ober gant *derc'houezet*. D'an eeunañ, e trofed ar ger dre *bezant* hep mui pe, mar mennfed derc'hel ur furm verbal, gant un dislank ster bihan avat, dre *bleniet*, *kenradet*, *enkreriet*, *ambilhet*. Ur verb deveret diwar *gwerc'h*, evel *dewerc'het*, a c'hallfed kinnig ivez, nemet e ve arvar d'e intent gant ur c'hennotadur platonek, da veizañ eskoridigezh un oberenn evel naouidigezh an *Derc'h* e-barzh ar *werc'helezh*.

Degouezhout a rafen gant an droidigezh-mañ :

“**soLLUNIAÑ LOURENNEK** : *luskad livouriezh (1940-1960) bezant / ambilhet er Stadoù Unanet gant Jackson Pollock hag e Frañs gant Georges Mathieu.*”

Un evezhiadenn c'hoazh : klenkañ arzourion e-barzh an un kombod dindan an un skritell zo chom e par an amveziadoù, mont hebiou d'ar beziad dieil, digent, anklenkadus dre anien ez eo pep oberenn. N'eus ket a istor an arz, an oberenn zo he istor dezhi he unan.

tr. gl. P. RICŒUR : “la présence corporelle en personne d'un objet individuel”, *Idées directrices pour une phénoménologie*, Gallimard, 1950, p. 126.

¹ Dave d'an droidigezh a ra “pennadurezhioù” *Diwan* eus Gl. *art abstrait* dre *arz diheverzh*.